

KANNAOIG

Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 78 Here - Du - Kerzu 2012 Priz : 3€

Embannidigezh

Emañ **É.A.T. IMBOURC'H** o paouez embann
Poanioù Spered an Tad Gwazdoue
Romant kentañ **Youenn Olier**
Bet skrivet e 1963 ha bet adwelet gant an aozour
a-raok e varv e 2004.

Youenn Olier

POANIOÙ-SPERED AN TAD GWAZDOUE



**IMBOURC'H
2013**

Hanter-kant vloaz 'zo, war e wele e klinikenn *Kerlena* Roskov, e skrivas Youenn Olier e romant kentañ, dres d'ar mare ma oa birvilh en Iliz ha ma voe digoret Sened-Meur Vatikan II e Roma.

Ur c'helenner war ar brederouriezh, an Tad Gwazdoue, eo an dudenn bennañ. Kelenn a ra en

ur skolaj prevez a Vro-Wened. Kavout a ra dezhañ ez eo dellezek eus ur post-labour gwelloc'h, en ur c'helenndi all, unan a lorc'h, e Pariz da skouer. Mouget e vez dezhañ etre mogerioù uhel ar skolaj-se. Klask a ra an dro da c'hellout ober troioù er-maez eus e skolaj gant e reolennoù strizh a drugarez d'ur ... strakell. An Tad Prefed - an Tad Bleiz -, a glasko lakaat e gabestr warnañ..., hag ar soubenn a drenko da vat etre an daou veleg.

War zigarez un romant leun a fent evel m'henn diskouez talbenn al levr e-unan, e taolenn Youenn Olier doare an Iliz d'ar poent-hont, en em gave etre daou ved : hini ar gevredigezh plouezet kristen a viskoazh o tizeriañ, hag hini ar gevredigezh kêrel dizoue, deuet diwar Filozofed an Sklêrijennoù... Diskouez a ra eta penaos edo an Iliz 50 vloaz 'zo, hag ar c'hemm ez eus bet er bloavezhioù tri-ugent-se.

Poanioù-Spered en deus an Tad Gwazdoue gant e vrokadennoù hag e c'hoantoù bugelel un tamm, dister ha farsus war-un-dro. Gant piv ez aio ar maout, gant ar "Bleiz" pe gant an "Oan" ?

Priz ar skouerenn : 18,50 € franko
evit Breizh, Bro-C'hall, Europa hag Amerika.

Kas ho chekenn da Yann MIKAEL
12 straed René Giraud 44130 BLAEN
Breizh - Brittany

**Ur prof evit Nedeleg
pe evit ar Bloaz Nevez**

**Nedeleg Laouen ha Bloavezh Mat
d'an holl**

Sevenadur an Digarez

Ur gaer a yezh ez eo ar galleg, darbennet¹ gant an holl dud dre ar bed. Gouest eo da ijinañ troioù-lavar eus an dibab. Unan da skouer hag a blij din ez eo “*la Culture de l’excuse*”, am eus kevyezhet diouzhtu gant “*Sevenadur an digarez*”, daoust ma vo feuket brezhonegerion “*pur jus*” zo, gant ur gallekadur ouzhpenn. Petra eo “*sevenadur an digarez*” evit ar C’hallaoued ? Reiñ a ran deoc’h ur skouer : pa vez graet “*disevenidigezhioù*” gant ar “re yaouank” er bannlevioù gall, disevenidigezhioù hag a zisoc’h war un toullad drougoberoù, gwalldaolioù a bep seurt, na pa vefe ken mogerioù ar savadurioù mastaret gant grafitioù divalav, laeroñsioù seierdorn ar mammoù-kozh, an tan er poubeleñoù, ha zoken c’hwezhañ an tan er gweturioù. Ne vez ket kiriek ar re a ra an “*disevenidigezhioù-se*” hogen ar gevredigezh an hini eo, ha n’he deus ket roet d’ar “re yaouank-se” kement ha ma c’hortozent diganti.

Nevez ’zo ez eo bet skoet va spered gant ar pezh a zo c’hoarvezet en ul lise micherel e Bourdel. D’an 11 a viz Gwengolo e oa bet argadet Christophe Varagnac, ur c’helenner war an istor-ha-douaroniezh, gant unan eus e sklolidi ha ne oa ket bet plijet p’en devoa lavaret ne oa ket Maroko, bro-orin e dud, un demokratelezh. Ur disac’hadenn begozhioù ha kunujennoù a zo kouezhet neuze war ar paourkaezh kelenner, ha da c’houde taolioù dorn ha taolioù penn, ken e kavas gwelloc’h tec’hout hag en em repuñ e levraoueg al lise, evit chom hep respont da emzalc’h feuls ar skoliad. Harzet diwezhatoc’hik en deus ar skoliad goulennet digarez er pennkerreizhva² ha digarezet eo bet gant ar c’helenner. Koulskoude e fell d’ar c’helenner kejañ gant mavdiern an deskadurezh. Evit komz outañ a-zivout ar feulster er skol ? Eus kudenn an Islam er Republik ? Tamm ebet, evit komz eus al laikelezh !

Kudenn al laikelezh c’hall, hervez ar c’helenner-se, ez eo e vefe re... gatolik. E Bro-C’hall e vefe pleustret ar “*gatolaïkelezh*”, a zispleg an den, a anzav bezañ frankveizour. “*N’eus nemet gwelout deiziadur an Deskadurezh Vroadel, pakret³ diwar ar gouelioù kristen. Ne welan ket*

kennebeut perak e vez lakaet gwez-sapr Nedeleg er skolioù. Ret eo bezañ kempoell”. Ya ! un tamm kempoellegezh a vefe mat da gaout amañ, hogen petore hini ? Kempoellegezh an Dispac’h gall a felle dezhañ skarzhañ pep tra eus an urzh kozh ; Kempoellegezh ar c’helenner frankveizour-se a anavezomp endeo, kounañ Fabre d’Eglantine – na barzhoniel e oa e anv – a ijinas an “Deiziadur Republikan”, hag a voe lakaet da dalvezout gant an droc’herion-gouzoug etre 1792 ha 1806. Kemmet e voe anv ar mizioù, soñj hoc’h eus, gant *Germinal, Floreal, Prairial, Thermidor, Messidor, Fructidor, Vendemiaire, Brumaire, Frimaire, Nivôse, Pluviôse, Ventôse*. Distaolet e voe ar sizhun, re bakret war seizh devezh krouidigezh ar bed gant Doue, hag amsavet e voe gant an degad, evit doujañ d’un tebet reizhiad dekvedel moarvat. Kemmet e voe anv an deizioù evel-just, gant pep a anvioù nevez : *Primidi, Duodi, Tridi, Quartidi, Quintidi, Sextidi, Septidi, Octidi, Nonidi, Decadi*. Gant an deiziadur gregorian e vez lidet bemdez anv ur sant kristen, ha kement-se a zo un hengoun a vez doujet strizh dezhañ atav⁴ : lamit gouelioù an deiziadur hag ho pezo manifestadegoù er straedoù a-berzh an dud o-unan, ha dreist-holl a-berzh ar c’henderc’herion hag ar varc’hadourion bleunioù, ar varc’hadourion frondoù ha bitrakoù a bep seurt a vez boas an dud da brofañ en degouezhioù-se - soñjit er Sant Valentin, Nedeleg, Pask... -, Mavdiern al Labour zoken - ha pa vefe sokialour – a vefe a-enep, rak dilabour a zegasfe an dra-se ha leun-barr ez eo endeo kib an dic’hwel. Dispac’herion 1792 ne oant ket chalet gant an dra-se. Lamet e voe anvioù ar sant, hogen evit stouvañ an toulloù lezet gant anvioù ar sent en deiziadur e oa ret lakaat traoù all (c’hwil oar ne blij ket an traoù goull d’an natur), neuze e voe lakaet anvioù bleunioù, plantennoù, gwez, anevaled, amprevaned, mein, metalioù, binvioù... evel-se e-lec’h St Erwan, d’an 19 a viz Mae e voe merket “*houlette*”, evit St Yann-Badezour, d’ar 24 a viz Mezheven e voe merket “*sorgho*”, evit St Gwennole, d’an 3 a viz Meurzh e voe merket “*fumeterre*”. Tri degad

¹ Darbennet : *admis*.

² Pennkerreizhva : *commissariat*.

³ Pakret : *calqué, plaqué, gwelout heñvel-pakret*.

⁴ Bemdez e vez kounaet gant ar skinwel, da vare ar c’heleier, gouel piv ez eo hiziv : Yann, Pêr, Paol... ne vez ket lavaret bep tro ez eo gouel ur sant, hogen pep hini a oar eus pelec’h e teu an hengoun-se : eus ar Gristeniezh.

deizioù a rae ur miz 30 deiz ha daouzek miz 30 deiz a rae 360 deiz, ar pemp deiz a chome evit ober 365 deiz ar bloavezh klok a oa anvet “*les sans-culottides*”. Barzhoniezh ha fent a oa gant an dispac’herion c’hall, memestra !

War-lerc’h prantad an Dispac’h gall e voe adlakaet pep tra en urzh kent, ha n’eo nemet nevez ’zo ma vez taget adarre an deiziadur gregorian : lemel Lun ar Pantekost, labourat d’ar ar Sul, lemel daou zevezh-gouel hengounel evit reiñ an tu da enklozañ gouelioù muslimat. Ne vez ket anv da lemel gouel Nedeleg memestra, re a drouz a rafe - soñjit er c’henverzh bleunius a zo bet diorroet en-dro d’ar gouel-se -, hogen dre argel⁵ ar gwez-sapr Nedeleg er skolioù, rebechet gant tud ’zo, e vez kroget d’hen tagañ. En tu all da verzhidigezh ar c’hrevier Nedeleg war al leurennoù publik dirak an ilizoù, ez eus koulskoude un tagadur all, korvigellus, a-enep da ouel Nedeleg : ar “Marc’hadoù Nedeleg” an hini eo. Un hengoun a zeu eus Bro-Elzas ha broioù ar Roen en Alamagn ez eo ar marc’hadoù-se. Emañ ar giz anezho oc’h en em skignañ en tammig e-pep lec’h er C’hwec’hkogn, betek e Breizh. Mat e vez kavet an marc’hadoù-se gant an dud, gant o garlantezioù sklerijennet hag o c’hanoù-Nedeleg, skignet dre uhelgomzerioù er straedoù, evit reiñ buhez d’ar bourc’hioù er prantad-se eus ar goañv ma vez berr an deizioù ha teñval straedoù ar c’hêrioù. Un dra hepken a zisplij da dud ’zo : ar ger “Nedeleg”. Setu perak e vez daskemmet anv ar marc’hadoù-se gant maerdiou ’zo, e-lec’h “Marc’hadoù-Nedeleg” e komzer muioc’h-mui eus “Marc’hadoù ar Goañv”, evel nevez ’zo gant maerdi kêr Amiens, e Norzh Bro-C’hall, ma vez muslimat tost an hanter eus he foblañs : “Sevenadur an Digarez” c’hoazh, evit chomp hep “feukañ” ar boblañs-se, pa vez o c’hengravezerion⁶ oc’h heskinañ garv ar Gristenion er Reter-Nesañ. Evel kelenner Bourdel, e tle soñjal Maer Amiens, n’eo ket ar re vras niver a enbroidi arallstuz⁷ a ra kudenn en e gêr, hogen frammadurioù a zeu eus ar

⁵ Argel : *symbole*.

⁶ Kengravezer : *coreligionnaire*.

⁷ Arallstuz : d’une autre culture.

gristeniezh a zo da gemm, rak diazas ez int evito⁸.

Daoust ha ne vez ket dre an hevelep argerzh⁹ e fell da Vavdiern an Deskadurezh broadel c’hall, Vincent Peillon, adstummañ empennoù ar skolidi yaouank gant kelennerzh e zivezelezh laïkour, pa gomz eus *diframmañ ar skoliad diouzh e holl savelegouriezh*¹⁰, *tiegezhel, kenelel, sokial, kefredel*. Sklaer-tre eo bet eztaolet an traoù gant ar Mavdiern, hogen daoust ha n’eo ket se a zo bet graet, gant gerioù all goloet, abaoe daou c’hant vloaz gant ar skol c’hall, adalek an Dispac’h gall ? Troc’hañ ar vugale diouzh o gwriziennoù naturel, evit o dereiñ d’ul laïkouriezh republikan, estren ouzh pep trehontelezh, ouzh pep speredelezh, evit o stummañ hervez o falioù kuzh.

Dre an argerzh-se e veizer mat-tre penaos ez eo deuet a-benn skol ar Republik c’hall da ober d’ar Vrezhoned disteurel o breizhadelezh, ha dont da vezañ Gallaoued, ha zoken, gwashoc’h evit darn anezho, reiñ dorn d’ar C’hallaoued evit hon divrezhonekaat. Evel-se ez eus bet kerent a zo bet enebet-krenn ouzh o bugale o devoa adkavet o breizhadelezh hag a felle dezho emezelañ en Emsav a-raok hag e-pad an eil brezel-bed. Evel-se c’hoazh, hogos holl mammoù ar rummad-se n’eus ket bet fellet dezho deskiñ brezhoneg d’o bugale, en abeg ma oant bet mezhekaet hag heskinet gant ar skol c’hall dre ma komzent brezhoneg. “*Graet o deus ar C’hallaoued eus diwezhañ rummadoù ar vrezhonegerion henvoazel rummadoù chas kannet ; deuet eo a-benn o mistri d’ober dezho kasaat ar pezh o diforc’he diouto*”, a skrive Youenn Olier en e dianlavar da bennad Yann Bouëssel du Bourg a-zivout tremenvan Job Morvan (1920-1988), *Imbourc’h niv. 233, Mae 1989, p. 40*.

Donwal Gwenvenez

⁸ An dra-se a ra din soñjal e komzoù Bertold Brecht en dije lavaret, mar ne fazian ket : « *Mouezhiet fall e vez gant ar bobl ? Cheñjomp ar bobl !* » E gerioù all : “n’eo ket hor mennozhioù hag a zo fall hogen an dud a gav anezho fall”.

⁹ Argerzh : *processus*.

¹⁰ Savelegouriezh : *déterminisme*.

Mirout ar Briedelezh naturel

Da heul ar raktres-lezenn da aotren an dimezioù etre tud heñvel-rev, o deus an eskibion savet o mouezh, ha pergen an Aotrou 'n Eskob Centène en deus

diskleriet e Porzh-Karoz : “*N’eo ket emellout e aferioù ar Stad diskleriañ a-berzh an Iliz ez eo an Eured un unvaniezh etre ur gwaz hag ur vaouez war*

wel treuzkasadur ar vuhez hag an desevel-bugale. N'eo ken 'met degas en-dro da soñj un anadurezh naturel a aoz kendalc'h an denezh dreist ar c'hantvedoù, ha kreskadurezh kempouez ar vugale er par denel hag er par bredel". Met soñjal a ra din, pa denn ouzh ar politikerezh, e rank al laiked kristen sevel o mouezh, ha n'eo ket hepken an eskibion pe ar Pab.

Gant ar raktres-lezenn da aotren an euredoù etre tud heñvel-rev e sav kalz goulennoù. Unan anezho eo daoust hag-eñ n'eo ket an afer-se un doare da zistreiñ ar c'hedveno diouzh traoù diaes evit ar gouarnamant, dreist-holl war dachenn an armerzh : an dilabour en deus kresket en un doare braouac'hus en un nebeut mizioù, seblantout a ra an armerzh hec'h-unan treiñ fall-tre pa gav kalz a dud ampellaat o dispignoù hag espern da c'hortoz ur wellaenn, an Euro en arvar muioc'h-mui, an tailhoù o kreskiñ, an TVA zoken, pa oa distaolet ar c'hinnig-se bet graet gant Sarkozy a-raok ar mouzhiadegoù.

Bez' e c'heller ivez en em c'houlenn perak 'ta e klasker kemm un ensavadur ken a-bouez eus ar gevredigezh ? An eured keodedel a zo bet marmouzet diwar ar Briedelezh kristen a zo kalz koshoc'h eget ar Stad C'hall – sevel a ra d'ar gwir roman a venne gwareziñ ar maouezed ma c'hellfent genel bugale e surentez - en em ziskouez aze evel ur sektenn c'hoant ganti sevel he relijion dezhi-hec'h-unan. Dija e oa bet klasket ganti henn ober e-pad an Dispac'h Gall pa oa bet heskinet kement an Iliz ha klask dibourc'hañ ar sevenadur e Frañs diouzh an deiziadur kristen da skouer. Nebeut war-lerc'h e voe roet degemer d'an torr-dimeziñ gant ar “Code Civil”. Abaoe ez eus bet graet “*araokadennoù*” all a dalv an holl anezho da vreskaat atav muioc'h ar Briedelezh hag ar familhoù da heul. Abaoe al lezenn war an hilastalerezh ez eo kresket spontus niver an torr-dimezioù, digresket dindan daou niver ar vugale dre vaouez, degemeret an diforc'hañ-bugale, a sav bep bloaz d'ur babig lazhet e kof e vamm evit pevar a vez espernet. 96 % eus ar c'hrouelloù trizomek a vez lazhet hiviziken hag all, hag all... Ur seurt relijion a zo en em ziskouezet da vat eta e Frañs, a vez aroueziet mat gant maodiern an “*Deskadurezh vroadel*”, V. Peillon, a zisklerie e oa evit ober kentelioù divezouriezh d'ar vugale d'o zennañ diouzh levezon o zud ha diouzh hini ar relijion ! D'ober anezho tud libr 'keta. D'ober anezho tud diwriziennet er gevredigezh ne lavaran ket.

Klask a ra ur niver bihan-bihan a dud e diabarzh bihan-niver an heñvelrevidi ma vefe anavezet ar Briedelezh etre daou baotr pe div blac'h, evel ma vez graet evit ar c'houbladoù paotr ha plac'h. N'eo ket e vefe stag kement-se e gwirionez an niver bihan-bihan-se ouzh ar Briedelezh hec'h-unan, evel m'hen diskouez anat ar sifroù er broioù e-lec'h ez eo bet kemmet al lezennoù war ar poent-se, nann. Pezh a fell dezho eo e vefe anavezet an heñvelrevouriezh

evel un dra reizh – komz a reont eus ur “gwir d'an diseblanted” (en o c'heñver), ken reizh hag an “arallrevouriezh” : o fal gwirion ez eo, pa ouzont mat e vez barnet gant ar sevenadurioù hengounel, ha pa vefent yuzev, kristen pe vuzulmat, evel “direizh” an darempredoù korfel etre tud eus an hevelep rev. Kounait danevell Sodoma ha Gomorha er Bibl.

Kelennadurezh an Iliz a zo gwriiziennet e daveennoù ar Skritur-Sakr hag ez eo aes d'ur spered eeun he c'hompren. Adalek gwerzadoù kentañ pennad kentañ ar C'henedeliezh e tiskouez Doue bezañ bet c'hoant gantañ krouiñ ar c'houblad “paotr ha maouez”. Evel-se o c'hrouas, hag hervez E skeudenn : evit ar Garantez hag evit degemer ar vugale. Daou zen heñvel rev ne c'hellont ket kaout bugale drezo o-unan. Aotren dezho advabañ bugale pe kaout anezho diwar oberiantizoù kalvezadel, a zo ent-anat nac'h a-youl ouzh ur rummad 'zo a vugale kaout, hervez an natur – ha youl Doue evidomp - hag un tad, hag ur vamm.

E keit-se, maodiernez “Gwirioù ar Merc'hed”, an itron Vallaud-Belkacem he deus diskouezet e dibenn miz Here ar reolennoù da stourm ouzh a pezh a anver an “homofobiezh”, ur ger a c'heller marteze treiñ gant “heñvelreizh-gaserezh”. Anat eo ez eo aozet an disentezioù nevez a-enep an “homofobiezh” evit lakaat an dud a-enep al lezenn nevez war ar Briedelezh da serriñ o beg, dre lakaat ar spont da ren. Pa vezo bet anavezet eta ar Briedelezh evit ar pared heñvel o rev, ne vo tu ebet da vurutellañ an heñvelrevouriezh.

Evel-se 'ta o devo tizhet an heñvelreizhidi ar pezh a glaskont hag e vo tu da gas ar Gristenion d'al lezioù-barn pa gelenn an Iliz ez eo an heñvelrevouriezh “un dra dizurzhiet anezhi hec'h-unan” (niv. 2358 Katekiz an Iliz Katolik). Dindan boan a gastiz ne vo tu ebet ken da gelenn ar wirionez-se. Dija, er pleustr, e weler kevredigezhioù gourzhtreiñ heñverevat o klask dont-tre er skolioù, zoken er skolioù emanvet kristen, hag e weler kabalerezhioù a-enep eskibion 'zo gant ar gronnadoù-se, pe c'hoazh lesbiennezed treuzwiket e leanezed ha dispak o divronn, skrivet war o bruchedoù luganoù evel “*Fuck the church*”. Ar merc'hed-se, lod anezho a orin ukreniat, izili eus ar strollad FEMEN, a zo gopret evit ober seurt diskeladegoù en Europa er mare-mañ : n'eo ket un emsav evel ar re all eta. Evel “*Pussy-riot*” e stalbezont dibaouez an Iliz katolik er meziennoù bras, a vourr ganto

Aes eo kompren perak. Daoust ma oa ar vanifestadeg eus ar Sadorn 17 a viz Du unan dibolitikel ha direlijiel e oar an holl ez eo an Iliz an nerzh-enebiñ pennañ a-enep an danvez-lezenn a zo war ar stern war ar Briedelezh. An deiz war-lerc'h e oa bet aozet ur vanifestadeg all aozet gant ar gevredigezh-stourm katolik hengounel “Civitas”. Siwazh ar c'hardinal Vingt-trois en doa diskleriet ne oa ket mat arguziñ a-

enep al lezenn gant arguzennoù relijiel kristen dre ma ne vefent ket mui komprenet gant ar braz eus an dud e Frañs. Peseurt tro-lavar hon eus e brezhoneg, pe a c'hellfemp ijinañ, evit treiñ o zroienn c'hallek "Tennet en deus ur volotenn en e dreid" ?!

Bezef pe vezef hag evel boas siwazh, ne reomp amañ nemet arvestiñ deiz goude deiz ouzh un istor, hini Vro-C'hall, a zo estren dimp forzh penaos, met a zo o kas ar Vretoned d'hec'h heul siwazh, evel nouspet lezenn drastus all a ya da zistruj penn-da-benn ar sevenadur kristen maz eo diazezet Breizh hec'h-unan. Seblantout a ra evelkent an darvoudoù mont war herrekaat er mare-mañ ken ne vefed ket souezhet ken gant netra ebef.

Da c'hortoz e c'halv Emglev An Tiegezhioù ar vrezhonegerion vrogarour da gemer perzh e manifestadeg an 13 a viz Genver, ur vanifestadeg a c'hellfe gwelout dekmiliadoù a Vretoned o vont da Bariz d'an deiz-se, evel ma oa bet kont e 1984 da enebiñ ouzh al lezenn a-enep ar frankiz-da-geleenn, "lezenn Savary". Siwazh e weler mat e peseurt stad eo degouezhet ar skolioù sañset "kristen" hag a zo deuet da vezañ hepken un adstal a eil renk eus an "Deskadurezh Vroadel", 25 bloaz war-lerc'h, daoust

d'ar manifestadegoù. Siwazh ez eo bet kemmet ivez dre guzh koulz lavarout al lezenn a verze an arnodoù war ar c'hrouelloù-tud e penn-kentañ miz Kerzu. Emeur ivez o c'hovelian un danvez lezenn nevez evit an helazherezh, da gemer plas lezenn ar c'hannad Léonetti. Ha piv a zo o vountañ da reiñ ar gwir da c'houlenn bezañ lazhet ? Léonetti e-unan (lenn "l'Homme Nouveau" 1528 ar 27 a viz Here p. 9), a lavar ken sioul ha tra "L'euthanasie n'est qu'un tout petit problème" ! Gant an amzer o treiñ e oar mat-tre ar strolladoù gourzhtreiñ, leviet mat-tre ma vezont, pergen el logelloù frankvason met ket hepken, lakaat ar gevredigezh da zegemer o mennadoù a nebeudoùigoù, o skuilhañ er c'hedveno takenn ha takenn binim "Sevenadur an Ankou". Seurt lezennoù, a ya a-grenn a-enep ar skiant vat (piv en deus c'hoant e vefe advabet e vugale gant pared heñvel-rev ma c'hoarvezfe gantañ mervel en ur gwallzarvoud karr-tan ?), ma vefent bet kinniget holl war-un-dro, n'o defe ket an disterañ chañs da dremen.

T. Gwilhmod

Ar Skritur adarre (3)

Ul lizher en deus kaset Jean-Claude Le Ruyet da Yann Maneguen da heul e bennad en niverenn diwezhañ. Setu amañ arroudoù anezhañ. Goulennet hon eus digantañ e adskriavañ diouzh ar reolenn nevez a ginnig evit al liammadurioù, ma welo pep hini peseurt kemm a zegas er pleustr.

Demad deoc'h,

Ha trugarez evid ho pennad e Nn 77 Kannadig Imbourc'h, ennañ un taolenniñ ag ar respontoù ho peus resevet diwar-benn ma c'hinnig : kemm un tammig an doare-skriavañ. Diskoueziñ a ra ar respontoù ho peus taolennet en ur mod berraet ur renabl, d'am soñj, ag an oll arguzennoù zo war ar marc'had. N'int ket arguzennoù toull, e gwirionez, ha gelliñ a ran o c'hompren. Mez un afer a sav-boent eo, me 'gred.

Kavet em boa e oa tostoc'h an Etrerannyezhel douzh ar brezhoneg a anavezen eged ar Peurunvan, a seblante din boud peuzunvan kentoc'h. Selled a raen douzh an Etrerannyezhel evel douzh un doare-skriv peurunvanet. Ha peurunvanet e oa, en ur mod... siwazh e vanke akord an dud warnañ !

N'em eus ket biskoazh soñjet e oa dav dimp kaoud daou sistem dishañval evid ar brezhoneg, ha n'em eus ket asantet biskoazh douzh ar Skolveureg daoubenneg. (...)

E gwirionez eh omp bet touellet holl gant afer an daou s (ss), daet da voud arouez ne ouian ket pesort

euzhvil, pa oa traoù kalz pouezusoc'h a-dreñv. (...)
A-benn ar fin em boa gwelet pegen tost e oa ar P-41 douzh an Etrerannyezhel-se lamet an daou s gantañ. Ne chome ket mui nemed "ur bramm koniñf" etreze. Ha dreist-holl e oa afer an dibennoù. A-gaoz d'al liammadurioù diouzh un tu (abalamour d'an efed Buben). (...)
Pa oa daet da A. Boché lâred din un deiz ne oa, a-benn ar fin, nemed peder reolenn evid surraad distagadur ar brezhoneg, e oa daet soñj din e ranken donnaad ar poent-se. Rag afer an taol-mouezh an heni eo a save ar vur etre KLT ha W. Marse ne vehe ket bet daet ar c'hompren din kenevez ar margodennoù, trugarez dezhe. Gant an doberoù teknikel e oan bet rediet da simplaad ma yezh e-pad an arvestoù. Goude-se e oa lojik ar pezh a zo digouezhet. Mez gouied a ran ne dremen ket mat ma sav-boent e-mesk ar Wenedourion. Diaez e vez dezhe, hiziv c'hoazh, dilezel an taol-mouezh gwenedeg. D'am soñj n'eo ket bet prezantet mat an traoù dezhe.

Evidin e c'hellomp gwellaad ar P-41 digudenn (en desped ag al lod ac'hanimp a ziskouez boud reutoc'h eged ar C'halled war poent an doare-skriv c'hoazh !). Degas a rahe ar c'hempenn-se kempouellded er yezh e-lec'h ma ra diouwer : diwar-se e vehe aesaet ar c'helenn (Reolenn 2 : hirder ar vogalenn dindan an taol-mouezh) ha korvo a dennehemp ag an efed Buben dre an dibennoù. (...)

Lâret em eus ma soñj, da beb unan bremañ da sevel e heni. Mez kompren a ran e c'hell an dud goulenn amzer evid lakaad ar c'hinnigoù-se da vout o re. Amzer am eus lakaet ive. Mez koll amzer ne vehe ket fur.

Joa deoc'h, JClaude Le Ruyet.

Addispleg :

Meur a hini en deus teurvezet degas c'hoazh frouezh e breder d'ar gelaouenn abaoe an niverenn diwezhañ. Diwar-benn al liester en -ion ez eo bet sachet hon evezh n'en em gav ar c'hraf-se nemet e-touez ar c'hrafoù a eil pouez en emglev 1941. Trugarez d'hor c'henskriverion diantav. Diouzh lenn arroudoù lizher

hir JC ar Ruyet n'omp ket sur e klotont penn-da-benn gant emglev 1941 dre maz eo levezonet-tre gant ar yezh a gomz bemdez : stummoù evel *diskoueziñ, gelliñ, ac'hanimp, ive* da skouer. Gwir eo ez eo strizh-tre reolennoù 1941 evit ur gwenedour ampart eveltañ. Ar skrid-mañ a zo moarvat ar poent pellañ a c'hell ober hep « renaviañ » penn-da-benn yezh e gorn-vro, daoust ma oa aet Roperzh Ar Mason pelloc'h c'hoazh. War bouez an evezhiadenn-se, pa n'eus mui kevredigezh vrezhonek kreñv da reizhañ distagadur an dud evel e 1941, n'eo ket sod gwellaat al liammadurioù er skritur, nann ?

Yann Maneguen

Prederiadennoù diwar lenn : Paganiezh (1/3)

“Gant aked e sellomp ouzh an traoù, an darvoudoù, an dud ; peseurt deskadurezh a dapomp en diwezh diwar kement-all a strivoù? (...)

Ster resis ur c'hrennlavar kozh, tra ken.”

Ar varzhoneg rusat-se an hini a zeu da gentañ d'am spered diwar lenn oberenn an Aotrou'n abad Gaume *La Révolution*. Al lavar kozh, en degouezh-mañ, a vefe ar ger “pagan”. A-wechoùigoù ingal em boa bet prederiet a-zivout ar ger-se, diwar guriusted ; ur ger o klotañ gant ur bed aet da get, hag ivez ur ger o tegas awen hag hunvre da galz tud en amzer-vremañ. Labour an abad Gaume en deus ma lakaet da verzout splannoc'h tresoù ar bed kuzhet war-dreñv ar ger-se.

Er Franche-Comté e oa bet ganet an Aotrou Gaume e 1802, anezhañ ur skrivagner relijiel fonnus, bet enoret gant kalz brefoù pabel hag anvidigezhioù all. N'eo ket dibar ar goulenn meur bet studiet gantañ a-hed daouzek levrenn an oberenn-se : *“Penaos en deus gallet ur metoù holl-gatolik, hep frankiz-artistenn, gant an holl gelennadurezh etre daouarn ar gloer, genel yoc'had niverus an dispac'herion c'hall enepkristen penn-da-benn (hag o heulierion) ? Perak ez eus hiziv ul lennegezh stank-meurbet evit difenn ar relijion gatolik, kenstur d'ul lennegezh ker stank all evit divrudañ anezhi (hep ma vefe trec'h ar gatoligiezh da vat e neb rann eus ar gevredigezh siwazh), pa ne veze ket ezhomm skrivañ evit difenn ar relijion er grennamzer (an direizhadenn nemeti o vezañ Summa Contra Gentiles Sant Tomaz, skrivet evit misionerion)?”*

Gwir, kalz respontoù a oa bet klasket dija kent grez an Ao. Gaume : ar Brotestantiezh an hini eo a zo kablus ! eme lod kaer. Ar Voltairouriezh, ar Filozofed ! eme lod all. An frankvasoned ! eme lod all c'hoazh. Ac'hanta ket, eme an abad Gaume, faziet eo an holl ginnigoù-se ; “an istor a ziskouez splann ez eo ar studioù er skolaj eo a zo pennkaoz d'ar reuz, hag e teu diwarno ivez an holl gaozioù all-se”.

Sed aze ar mennozh displeget hag addispleget, elfennet ha dielfennet, prouet hag azprouet gantañ, hep morse skuizhat en e *Révolution* ; “n'eo ket breutaat eo a ran, lezel an istor da gomz hepmuiken”, sed aze e c'her-stur. An diverradenn a ginnigan a vo rannet hervez an urzh amañ dindan :

- 1) Ar studioù er skolaj
- 2) Pagan eo an dispac'h gall
- 3) Ganedigezh ar galleg pagan
- 4) Latin adsavet en Azginivelezh
- 5) Paganerezh : sevenadurel
- 6) Paganerezh politikel
- 7) Azganidi eus an eilvet rummad eo ar brotestanted
- 8) Ur bed truezus
- 9) Nag en amzer-vremañ ?
- 10) Lignez an Ao. Gaume.

1. Ar studioù er skolaj

Sant Yerom oberer ar Vulgata a soñje dezhañ bezañ aet da gristen mat gant e strivoù hag e vuhezegezh kalet, pa reas un hunvre ma welas aeled o lavaret dezhañ n'oa ket kristen, n'oa anezhañ nemet ur c'hikeronian brein a lenne Kikero pe re all gwashoc'h c'hoazh diwezhat da noz. Skoet bras anezhañ, e touas Sant Yerom chom hep lenn skrid pagan klasel ebet ken. Sant Eosten a anzav en doa kollet e dro-spered disoursi diwar lenn skridoù pagan. Napoleon Buonaparte a zispleg penaos en doa kollet feiz startik e vugaleaj abalamour d'al lennegezh pagan e oa bet rediet da zeskiñ er skolaj. Hag un hanterenn pe dost eus ar *Révolution* a zo gouestlet da ziskouez dre ar munud penaos an holl zispac'herion, kefredourion, filozofed a oa bet kollet an eil koulz hag egile gant ar gelennadurezh lennegel

pagan sanket enno e studioù ar skolajoù kristen war-lerc'h an Azginivelezh.

E giz-se, kelennerion Voltaire er skolaj da skouer ne oa ket anezho jezuisted al lise *Louis Le Grand* ; adlavarerion e oa ar re-se ha netra ken. Sallustus, Kikero, Takitus, Virgilius, Ovidus, Horatio, Anakreon, sed aze e wir vistri. Ha Voltaire, evel kement a re all, a sevenas e vuhez-pad ar pezh a oa bet kelennet dezhañ er skolaj : meuliñ hag azeuliñ betek re ar vistri-se - azeuliñ o skridoù, pa lavarim mat. Ar gelennadurezh lennegel iskis-se a c'hane tud yaouank diamzeret, estrenion en o bro dezho o-unan : er broioù katolik e veze leuniet ganti ar pennoù a baganiezh ; er broioù unvelour e veze leuniet ganti ar pennoù a rouelazherezh. Diwar se e c'haller kompren orin an doñjer souezhus maget gant ar skolajidi-se evel Voltaire pe Diderot ouzh o c'helennerion, a oa disi o buhezegezh hag o vertuz a-hend-all.

2. Pagan eo an dispac'h gall

Roma (bagan), Atenas, Sparta : en tri bed enk-se e chom holl gelennadurezh lennegel ar skolajoù war-lerc'h an Azginivelezh, hag holl vred an holl gefredourion, skrivagnerion, politikerion bet resevet ganto ar gelennadurezh-se, hag ivez o holl oberoù sevenadurel pe bolitikel. Anv rannad politikel ar *Montagnards*, “Re ar menez”, a zeu ez-anat diwar hini strollad Atenas. An troc'h etre an “tu dehou” hag an “tu kleiz”, a lakaer e orin er Stadoù Jeneral, a zo gwriziennoù donoc'h dezhañ : an tu dehou a glot gant an impalaerouriezh etrebroadelour roman ; an tu kleiz a glot gant ar vuhezegezh-kalet-ha-yac'hus ret evit an holl ha gant ar fae ouzh an arc'hant, giz Sparta (Lukurg en doa difennet arverañ an arc'hant hag an aour en e vro, ha rediet an dud da implij houarn nemetken evel moneiz, koad gros nemetken evit sevel tiez).

Istor Bro-C'hall dispac'hel a zo hini Roma bagan diverraet : Roma a argas an d-Tarkined, hag a lak an holl vroioù tro-war-dro da sevel a-enep dezhi en abeg da se. Brezeliañ a ra Roma ouzh an holl, war un dro e ijin lezennoù awenet gant sevenadurezh Atenas. Ar republik veur krouet diwar-se a vez renet gant amprevaned o tebriñ an eil egile, hag a zeu da vezañ rouesoc'h-rouez neuze : war-lerc'h an *decemvir*-ed e teu an *triumvir*-ed Oktavius, Antonius ha Lepidus, ha war-lerc'h lazhadegoù a-vil-vern e tro ar republik da Impalaeriezh dindan beli dir Tiberius, a vez kavet dousoc'h koulskoude gant ar bras eus an dud e-keñver ar pezh a oa a-raok. Memes mod, Bro-C'hall a lazh he roue, hag a lak an holl vroioù tro-war-dro da sevel a-enep dezhi en abeg da se. Brezel a ra Bro-C'hall ouzh an holl, war un dro gant ijinañ lezennoù awenet gant sevenadurezh Atenas. Ar republik veur krouet e-giz-se a zo renet gant amprevaned o tebriñ an eil egile, hag a zeu da vezañ rouesoc'h-rouez neuze : war-lerc'h an *decemvir*-ed e

teu an *triumvir*-ed Robespierre, Saint-Just ha Couthon, ha war-lerc'h lazhadegoù a-vil-vern e tro ar republik da Impalaeriezh dindan beli dir Buonoparte (hemañ a lavare en ur c'hoarzhin “*Roit ur gwiskamant kaer hag ur gourc'hwel kaer d'ar brezegegerion-lazhadegerion-se, hag e roont peoc'h deoc'h!*”), a vez kavet dousoc'h koulskoude gant ar bras eus an dud e-keñver ar pezh a oa a-raok.

Kement-se n'eo ket un taol-degouezh hepken : holl oberoù politikel pouezus an dispac'h a zo bet sevenaet en anv ar baganed c'hresian pe roman, ha prouennoù e-leizh a gement-se a gaver e kelaouenn ar *Moniteur* hag er skridoù dispac'hel all, restadennet puilh e peder levrenn gentañ oberenn an Ao. Gaume. Evit reiñ ur skouerenn e-touez degadoù a re all, haolioù¹¹ mab-den a lavarer ez int bet roet gant an *Natur* da vab-den, ha gourbannet e vezont a-unan gant ar Bobl-Soveren, jaojet gant skeudenn un Herkules (arouez an nerzh dall er gwengelouriezh gresian) o flastrañ ur gurunenn, gantañ un horzh en e zorn dehou hag ur voul-douar en e zorn kleiz. Relijion Robespierre ne oa nemet ul lankad etre ar gravez kristen-da-vezañ-peurziverket hag ar gravez pagan-da-vezañ-peuradsavet ; Gabriel-Andrev Aucler, alias Quintus Aucler, an hini eo a oa aet ar pellañ war an hent-se. Gerioù Barrère “Ret eo distrujañ Bro-Vendée” n'eus anezho nemet un drevezadenn eus prezegenn Katon Kozh, ha meur a jeneral a oa war ar renk evit bezañ e penn al lazhadeg-veur-se, peadra da zont da vezañ ur Skipio nevez. Ar wilhotin n'eo ket bet ijinet gant an doktor Guillotin (hemañ en doa kinniget arverañ ar benveg hepmuiken) ; anavezet hag implijet e oa bet dija gant ar Romaned, a rae *manlius* anezhañ.

3. Ganedigezh ar galleg pagan

Liv an unton a zo, tamm pe damm, war darn eus renabl an Aotrou 'n Abad. Ur falldech e vefe a-fed lennegezh, a-fed istor avat e tiskouez ur sell lemm : barrek eo an Ao. Gaume da ginnig restadennoù eus skrivagnerion pagan klasel, azganidi, skrivagnerion c'hall, protestanted, dispac'herion 1789 pe 1848, ha ken peurunvan eo al lavarou, ken ne c'hellfec'h ket lavarout eus pelec'h e teu ar frazenn, keneve ar yezh pe an notenn en he c'hichen. Ar ganenn laret hag adlavaret gant an holl skrivagnerion-se, hag a groger da glevout adalek grez an Azginivelezh, a c'haller diverraat hervez an tri foent-mañ : 1) Ar bed pagan-gresian-roman ez eus anezhañ an hini kaerañ hag an hini gwellañ a vefe bet biskoazh, netra ne dalvez ar boan bezañ studiet er-maez anezhañ. 2) Holl bed kristen ar grennamzer a zo peurzgomprenadus, ha didalvez pe fall, anezhañ ur wallzarvoud dicheñsus e-barzh en impalaeriezh pagan peurbadel. 3) An dud n'int ket tremenet ag ar ragistor d'ar grez istorel abalamour d'ur pec'hed-orin bennak, met dre ur “c'henemglev dieub” (συνάλλαγμα, bet troet

¹¹ Haolioù : *gwirioù*

“*contrat social*” e galleg gant Rousseau). Lod eus ar skrivagnerion bagan, evel Virgilus hag Ovidus, a daolenn ar ragistor evel ur baradoz : ac'hann e teuio keal ar *bon sauvage* giz Rousseau; lod all, evel Kikero hag Horatio, a daolenn ar ragistor evel un ifern a oueziri, ac'hann e teuio mennozhioù Hobbes war ezhomm ul *Leviathan* o lakaat an urzh-vat da ren dre ar spont).

Hag eus pelec'h e teu an Azginivelezh hec'h-unan ? Ar baganiezh en doa Hor Salver diskleriet brezel dezhi (ur brezel da vezañ gounezet gant merzherion avat e-lec'h alouberion), ne varvas ket en un taol. En impalaeriezh buzantat dreist-holl e c'hellas krakvevañ, diwar an azeulerezh betek re e-keñver an impalaered, kv. ar lesanv “ισαπόστολος” (“evel un abostol”) bet roet dezho, diwar an anvidigezh-da-impalaer meizet evel un eizhvet sakramant, diwar ar boazamant m'o doa an impalaered buzantat da envel da sent lod mignonned pe tud o familh, evel an uhelgargidi roman a zoueekae pe a zizoueekae kerent, galanted pe mestrezed hervez o did hag o imor. Da ziskaridigezh Konstantinopl e 1453, ar virus pagan, bet peurgrignet gantañ kristeniezh ar Reter a yeas da glask magadurezh e lec'h all hag a veajas war un dro gant an harluidi c'hresian betek Firenze. Adal neuze e vo aloubet Italia da gentañ, hag Europa a-bezh da c'houde, gant ur spered pagan nevez : tra ma chome kristen ar vistri politikel en o c'homzoù, etrezo hag o roched ne gredent nemet er

politikerezh kriz-put ha divezh-diharz (diverraet mat en droienn vrudet, “*Vae Victis*”) displeget e skridoù Plutark, Kaezar, hag addispleget gant Makiavelli. Tra ma chome kristen ar gloer en o c'homzoù, etrezo hag o roched ne lennent nemet Kikero, Virgilius, Plautus ha me oar-me, hag e leugnent an ilizoù gant adeiladouriezh, skeudennoù ha delwennoù pagan. Ar Pab Jul II e-unan a lakaas distrujañ penniliz Sant-Per e Roma evit adsevel anezhi giz pagan.

“*An enbroidi c'hresian a gelennas ar baganiezh da b-Pomponas ha Makiavelli, ha diskibled da v-Makiavelli e voe Buchanan e Bro-Skos, Hobbes e Bro-Saoz, Bodin e Bro-C'hall, Wolf, Puffendorf, Grotius ha Febronius e Bro-Alamagn. Diskibl da Febronius e voe Rousseau...*” Rousseau ha Voltaire, hag a adlavaras c'hoazh e galleg ar pezh a oa bet adlavaret a-hed an tri c'hantved a-raok, a zo anezho labourerion an unnekvet eur er par-se : tremen a reont evit krouerion orinel pa n'int nemet diwezhañ ailhedenn ar chadenn. Adal neuze e teuas ar galleg da vezañ stag ouzh ar baganiezh “dispac'hel” e spered an holl, daoust ma oa bet displeget ar mennozhioù pagan politikel-se en holl yezhoù all dija a-raok. Setu perak ez eus hiziv meur a strollad galleg katolik a vez gwelloc'h ganto ober “Franked” anezho o-unan. *Da genderc'hel...*

Ewan Delanoy

Rebetiko

E niverenn 394 AL LIAMM ez eus un danevell gant **Kristian Braz**, “*Rebetiko*”, ez eo aet priz kêr Garaez 2012 gantañ. Istor ur vaouez hanterkant vloaz eo, diberc'hennet eus he zi gant he « gwaz » muzisian a zilez anezhi evit ur plac'h yaouankoc'h. Dont a ra dezhi en-dro skeudennoù eus bro C'hresia, ha son ar “**Rebetiko**” war-un-dro. Leun a c'hwervoni e tiviz ar vaouez ampoezoniñ an den, tad he bugale, ma veve gantañ hep bezañ dimezet abaoe 30 vloaz.

Framm an istor a zo eeun-tre eta, met an doare da zanevelliñ anezhi eo a zo bet priziet mat gant ar varnerion, hag ivez, moarvat, an daveennoù niverus d'ar sonerezh gresian, a laka al lenner divarc'het un tamm pa n'anavez ket an tonioù-se ha pa rank digêriañ diouzh e ved evit ober anaoudegezh gant Bro-C'hres. Enrollet eo bet an danevell gant ampartiz ken ez eo un dudi : fraezh hag heson eo mouezh al lennerez a glever dreist sonerezh bro C'hres eta, ha trouzioù e liamm strizh gant an danevell <http://podcast.rcf.fr/emission/125409/450624>.

Un evezhiadenn hepken war ar yezh : ur stumm iskis eus ar verb kaout ez eus er skrid ha lerc'h-ouzh-lerc'h (p. 10, 11 ha 13 war an 19 pajennad) : « 'm boamp » e-lerc'h « hor boa ».

Seblantout a ra ar c'houblad-se bezañ unan eus amzer ar « frankiz » devoudet gant darvoudoù miz Mae 68. Frankiz war bep tachenn. Hini ar revelezh pa ouie mat ar vaouez ne oa ket he « gwaz » feal dezhi. Hag hini nac'hidigezh “chadenn” ar Briedelezh en anv ur Garantez gwirionoc'h, sañset, hogen dreist-holl romantel-tre evit ar merc'hed, me 'laka. Ur Briedelezh naturel digevrat, nay a-benn ar fin, evel m'hen diskouez an danevell. An tebet-frankiz-se a nac'h pep gwarez ha surentez ouzh ezel gwanañ ar c'houblad, ar vaouez peurvuiañ, dre ma rank-hi bezañ atebek evit daou hag aberzhiñ he buhez vicherel da sevel ar vugale. He den ne sikouro tamm anezhi. Perak en defe graet he den paz eo koazhet e garantez ha n'int ket en em roet an eil egile evit ar vuhez e stern kenglotus ar Briedelezh etre paotr ha plac'h ? Gant ar vuhez vodern n'o deus ket ar merc'hed kement-se ezhomm eus stern start ar Briedelezh : aesoc'h eo ar vuhez p'eo kresket al live-bevañ. Evit ar merc'hed e « oa » graet ar Briedelezh da gentañ-holl ha n'eo ket evit ar baotred, se a ranker merkañ pa n'eo mui anat er gevredigezh a vremañ.

N'eus barnadenn sklaer ebet en danevell diwar-benn ar muntr bet sevenet gant ar vaouez : d'al lenner ober

e soñj eta. Penaos e raio p'emañ beuzet e spered gant trivliadoù ar paour kaezh plac'h hegreidik-se ?

En anv ar frankiz ne veze ket alies er gêr hag en doa bet serc'hed. En anv e arz hag ar frankiz en doa kavet reizh he dilezel da vat hag he diberc'hennañ. Hag en anv ur justis ha n'eo nemet dial pa n'eo na justis an dud nag hini Doue, ne ra ar vaouez-se nemet en em lorbiñ hec'h-unan : en Ifern e chomo er bed-mañ gant he muntr ha ne c'hellou tec'hout diouzh he buhez reuzeudik nemet oc'h anzav e oa faziet he doare da

welout ar vuhez « priedel » abaoe an deroù, mare he yaouankiz. Kalz he deus gouzañvet hag an traoù o defe ranket tarzhañ pell a oa. Peseurt nerzh he mire 'ta ? Ar garantez. Karout a rae un tasmant. Diwar-se ne c'helle an traoù nemet treiñ da fall, evel gant un niver uhel-mat a goubladoù en hor c'hevredigezh pellaet diouzh patrom ar Briedelezh kristen. Dreist-holl eo bet disoñjet ganto ar pardon.

T.Gwilhmod

Sec'hed am eus !

Ur sec'hed loskidik a zalc'he Jezuz abaoe e enkorfadur : ober youl e Dad. Stumm kalir Getsemani a gemero ar sec'hed-se : kib dievadus ha koulskoude c'hoantadus, a zalc'h war un dro pec'hed ar bed ha Silvidigezh ar bed. Eztaolet en devoa endeo e sec'hed d'ar Samariadez. Lavaret en devoa dezhi : *“Ro din da evañ !”* Bremañ, ar soudard roman a astenn ur spoue dezhañ, a enkorf goaperezh an denion. Diouganet e oa bet ar jestr-se gant ar salm 69 : *“Va enebourion, evit distanañ va sec'hed a ro din da evañ gwinegr”*. War beg ur goaf-bann, ar soudard-se, oc'h ober un drevezadenn a gendruetz, a zoug da ziweuz an hini kroazstaget ur spoue leun a winegr evit distanañ e sec'hed loskidik. Hervez Sant Yann edo an diougan o seveniñ eno : *“Hag em sec'hed roet din da evañ gwinegr”* (salm 69/22). Spontus eo sec'hed ar c'hoazstaged, broudet gant ar gwad kollet, ar c'hweziñ ha labour ar c'higennoù ret evit gellout analat. Da sec'hed bevedouriezhel an den toc'hor dizouret ez eus ouzhpenn ar sec'hed speredel.

“Sec'hed am eus”, a vo komz diwezhañ-holl eztaolet gant Jezuz a-raok dezhañ rentañ e ene d'an Tad. Garm a ra e sec'hed da Zoue gant gerioù ar salm : *“Sec'hed en deus va ene eus Doue, an Doue bev”* (Salm 42/3), *“O Doue, va Doue, deoc'h em eus hiraezh”* (Salm 63/2). Anat eo, un oberenn a garantez ez eo ar Golgota. Hogen e garantez a zistremen, a drehont oberenn ar groaz. War-lerc'h bezañ profet e gorf, e wad, e vamm, e vuhez, e varv, war ar c'hrouglec'h, e ro deomp da ziwezhañ e sec'hed. Gourfennet¹² eo bet e hanvoud¹³ douarel e stad a sec'hed. En em stagañ a ra ennañ da viken. Jezuz a varv sec'hedet. Doue ha den, douevel ha denel eo e sec'hed. Bez' e pado betek diwezh ar bed.

E c'houzañvidigezh a bad hag a bado, rak eurvad peurbadel an den ez eo a zo en dalc'h. Un diskuliadur graet da Santez Julianna Norwich ez eo kement-mañ. Evel hor penn, ez eo gloarekaet ar C'hrist, eürus da viken, divevenn. Hogen en e gorf

kevrinel¹⁴, da lavarout eo Jezuz hag ar vadezidi a vev eus buhez douevel, n'eo ket c'hoazh gloriusaet penn-da-benn. Setu perak e vo bepred gant Jezuz ar sec'hed-se, tresantet war ar groaz, betek ma vo salvet ha evurus an ene diwezhañ.

Bremañ, Jezuz kroazstaget a laosk deomp : “Sec'hed am eus ac'hanout, da vezañ karet ganit. Emaon ouzh dor da galon hag e skoan. Digor din rak sec'hed am eus ac'hanout. Ur sec'hed loskidik am eus da gaout ac'hanout ennon evit da eurvad. Evet em eus kib ar c'hwervoni ha kounnar douevel va Zad (Yann 18) ha da bediñ a ran da rannañ ganin kib ar silvidigezh, kib an Hegaristiezh. Sec'hed am eus ac'hanout evel maz out. Atav ez eo digor va c'halon, maz eus ac'hanout un ene c'hoantek, un ene sec'hedet da garout ha da vezañ karet. Krouet out bet evit ar sec'hed-se, ha me hepken a c'hell terriñ anezhañ. Bezañ sec'hedet eo da c'halvedigezh a Gristen. Lavarout a ran dit : *“An hini a zeu davedon n'en devo mui sec'hed”* (Yann 6). Da sec'hed a eurvad, me hepken a c'hell e zistanañ. E sioulder da galon e c'hellez va selaou o lavarout : *“Sec'hed am eus !”* Ya, terriñ a ran an holl sec'hedoù. Sammañ a ran em izelidigezh diziwezh ar gefridi da derriñ holl sec'hedoù an denelezh.

Sec'hed hon eus da vezañ karet ha kaezhiget. Hogen sec'hed hon eus en aner o klask ar garantez-se, o klask leuniañ ar gouloder-se en hor c'hreiz, gant plijadurioù berrbad ha zoken gant netra bras ar pec'hed. Sec'hed a vagadurezhioù douarel, a beurloud. Sec'hor gouelec'h hon trubuilhoù. Mont a ra a-gevret diouer a sec'hed ha buhez diaes, didrec'hus. Ar re varv n'o deus ket sec'hed. Ar C'hristen gwalc'het, douret, a zo ur C'hristen hanter-varv. Berrbad ha diwar-c'horre ez eo ar sec'hedoù-se.

Mari ha Yann o deus dastumet, e-harz ar Groaz, ar garm vouedel ha denel ha stivelloù dour bev strinket diouzh kalon drebarzhet an oan aberzhet (Yann 19). Gant ar Werc'hez ha gant Yann ez eo ret meizañ mat, diouzh an diabarzh, sec'hed karout Kalon ar C'hrist. An Diskuliadur a gloz ar Bibl evel-se : *“Hag*

¹² Gourfennet : *achevé, terminé.*

¹³ Hanvoud : *existence.*

¹⁴ Kevrinel : *mystique.*

an hini en deus sec'hed, ra zeuio ; an hini en deus c'hoant, ra zegemero eus an dour a vuhez evit netra" (Disk 22/17). Pa zeuio en-dro er c'hloar, gant ma c'hellimp klevout anezhañ o lavarout dimp : *Sec'hed*

am eus bet ha roet hoc'h eus din da evañ" (Mazh 25/35).

Youenn Troal

Relijion ar vamm-gozh

Renet em boa bet e miz Gouhere 2011, e-kerzh KEAV Kastellin, ur bodad labour war an treiñ. Etouez an testennoù bet troet ganimp e oa houmañ, tennet eus levr kempred Mona Ouzouf, merc'h Yann Sohier, "Composition française". Kinnig a ran an droidigezh-mañ evel un testi eus relijion ha tro-spered Brezhizeladezed 'zo en hanterenn gentañ ar c'hantved diwezhañ.

Yann Talbot

Kement ha ma c'hellan barn e oa dianken relijion va mamm-gozh. Nebeut a gomze-hi diwar-benn an Ifern, a gemer kement a blas e Breizh, dindan stumm ar geolioù-se digor bras evit lonkañ ar bec'herien a bep seurt hag ar merc'hed kollet, evel "Katell" kalvar Plougastell a oan tuet dezhi rak plijout a rae din he raganv. Ganti eo avat em eus bet klevet evit ar wech kentañ an anv gwan a vez implijet pa vez kaoz e brezhoneg eus an ifern : «yen», an ifern yen, ha «skornet» e oa, evel ma skriv Pêr-Jakez Helias, pe «kriz» evel ma arbenn Zavier Grall, skornet an deiz a hiziv gant ar yezhourien a ro d'ar ger «yen» ster ur varnadenn dic'halv ? Goulenn a ran ouzhin va-unan hag eñ he deus ar rendael ur ster bennak evit ar Vretoned boas ouzh douster o hin pa vez tra-walc'h dezho e ve yen an amzer evit ma vefe kriz. D'ar mare-se evidon, e talvez, diarvar ken sur ha tra, kement ha mont-tre en ur bed skornus. Met ne seblante ket bezañ un dra asur e soñjoù va mamm-gozh. Pediñ a rae evit an Anaon (eneoù ar Purgator), met ne oa ket al lec'h dispis-se, evel an ifern e-unan, un dra da eñvoriñ na da gaout aon dirazañ.

Krediñ a rae start evit gwir e talvez deoc'h ur vuhez vat er Baradoz, hag ur vuhez vat a oa an hini he doa renet a-viskoazh : oberenn fall ebet a-ratozh, klemmoù didalvoud ebet, kalonegezh, briegezh, ha bezañ asur da vezañ graet dalc'hmat ar pezh a oa dleet ober, evel sevel he daou vugel, hag, evel hec'h hini, merc'hig he c'hoar Janed marvet diwar ar c'hrign-bev e 1919. Keuz a-walc'h am eus an deiz a hiziv da vezañ chomet hep goulenn diganti (eus va ferzh koulskoude he dije degemeret an dichekadenn-se) eus peseurt pec'hedoù e c'helle eta en em zieubiñ e skeud karzennek ar gador-gofes, ha ne gredan ket e vije bet biskoazh en he soñj tamall outi hec'h-unan mac'homañ he merc'h.

Mont a rae ingal da gofes evel maz eer da di an dentour, ma ne 'z ae morse di forzh penaos abaoe ma oa bet tennet dezhi en un taol, gant un arzour eus ar

vro, he holl dent, kemeret o lec'h gant an dra-se, heugus un tamm, soubet en ur werenn war he zaolnoz hag a ziwallen da sellout outañ. Mont da gofes a oa un dra vat d'ober, un afer yec'hed a oa diezhomm da reizhabegañ.

Ma ouie petra a oa ur vuhez vat e ouie ivez petra a oa ur marv mat. Kontet he doa din marv Kaourintina he mamm, ur marv evel m'en deskriv Philippe Ariès, kentelius ha dirak an holl. En-dro d'an hini war he zremenvan en em zalc'he an amezeien deuet da ziskouez o c'hengred, seizh war eizh bugale vev, hag a ouele. Kaourintina o frealze : "perak leñvañ bugale, peogwir emamp o vont d'en em welout dizale". Evit ar veaj vras, ez ae kuit Kaourintina gant pourveziou marzhus : bezañ sur eus ur plas en Neñv e kreiz he holl dud. En diarvar-se dres eo e oa evit ar Baradoz, kement ha ken bihan na oa ket ezhomm da venegiñ e sonerezhioù hag e sklerijennoù, na zoken arvesterezh peurleunius an Aotroù. Ar bromesa da adkavout ar re a oa bet karet ganti a oa a-walc'h. Ha hi eo a zishuale va mamm-gozh diouzh kemennadurioù pismigus ha pizh an Iliz, hag a roe dezhi e-keñver ar veleien da vezañ dibalamour ha godisus. Paotred e oant, da gentañ, hag eviti eta eus an eil reizh. Hag ivez gwazed hepken, da lavarout eo, boudoù den, tud, gant albac'hennoù da disterveziou a oa tu d'ober goap outo. Derc'hel a rae evelato da vezañ feal ouzh an ofisoù hag ar sakramantoù : war an dachenn-se evel war ar reoù all he dije bet mezha da chom hep ober "ar pezh a oa dleet ober".

Ur relijion eus ar vered e oa hec'h hini, kentoc'h eget hini an Iliz, he fealded ouzh ar barrez kentoc'h eget ouzh ar gloer. Pa vezen en he zi, e Lanniliz ("va zumañ", a lavare-hi) e raemp gant lid goude ar Gousperoù un dro-vale er veredig (kresket-mat eo bet), gwed-tilh en-dro dezhi, hag a welan bepred evel ur porzh-bered peoc'hus, klouar hag heoliek. An "droiad" Sul-se, pouezusoc'h eviti eget mont d'an oferenn, a oa lidek-kenañ : da gentañ e ranker bizitañ ar gerent a-bell ; erfin ne vanker morse d'ober un tamm poz e korn ar vugaligoù marvet divadez, m'emañ eno ar beziouigoù, ar c'hroaziouigoù. Ne gredan ket bezañ santet eno ur from espar met pec'hedoù avi, avi dirak ar perlezennoù gell-mouk ha glaz-ruz a ginkle ar c'hroaziou hag a dreuzfurmen em faltazi e kolieroù. N'em boa ket c'hoazh an emskiant ne baoueze ket va mamm-gozh da vevañ gant eñvor he merc'hig marvet da bemp bloaz ha gant ar skeud-se eo e veze o tivizout en ur zaleañ dirak ar beziouigoù.

Ar pezh a souezh ac'hanon en deiz a hiziv eo e tileze e Plouha ar vered penn-da-benn daoust ma taremprede an iliz. Plouha a oa e-touez bourc'hioù Breizh unan eus ar re o devoa disrannet an Anaon diouzh ar re vev en ur zilezel o beredoù kozh. Ar vered pell-se, va mamm-gozh he dianaveze, ha me 'gred n'eo ket bet enni morse ; nag evit un obidoù bennak (ar re a varve er gumun ne oant ket tud eus he farrez c'henidik, n'he doa skoulmet eno

mignoniezh ebet, marteze abalamour d'he gwiskamant ha koef bro-Leon na oa nemeti o tougen e nev an iliz) nag evit un droiad vale Sul ganin. Eus ar beziou-mañ ne save mouezh ebet eviti. E Lanniliz er c'hontrol e kerzhe e-kreiz he re, e “parkeier an Anaon” ma rae eno kompagnunezh gant an eneoù.

Mona Ozouf

Aet eo Youenn Kraff da Anaon



E penn-kentañ miz kerzu ez eo aet Youenn Kraff da Anaon. Abaoe un nebeut mizioù e ouie ne chome ket pell amzer gantañ da vont da gaout an Aotrou Doue.

Eus rummad Youenn Olier e oa. Gantañ ha Marsel Blanchard, person Kistinid, en doa graet e servij soudard e kazarn Sant-Brieg e 1945. Chom a rejont mignoned vras a-hed ar bloavezhioù a stourm en eil hanterenn an ugentvet kantved.

Labourat e reas a-hed e vuhez evit eñvor an Aotrou Perrot, abostol “Feiz ha Breizh”, e “Unvaniezh Koad Kev” ha “Mignoned Feiz ha Breizh”, gant ur bennegezh vras. E luskad “Iliz ha Breizh” er bloavezhioù '70 e voe oberiant ivez evit an oferennoù brezhonek kentañ e korn-bro Kemperle.

Doue d'e bardono !

Oberiantizoù Emglev An Tiegezhioù

Lec'hienn nevez Emglev An Tiegezhioù

N'eo ket fall stadegoù kentañ al lec'hienn ouzhpenn mil lugadenn d'al lec'hienn a zo bet e doug miz Du. 35 pennad a zo bet postet war a bep seurt danvezioù. Dreist-holl ez eo bet lakaet en-linenn :

-Renabl holl niverennoù hag embannennoù Imbourc'h abaoe ar penn-kentañ : eus 1969 da 2005. Gant ar fichennaoueg hir-mañ ez eus moaien da adkavout pennadoù adalek ur ger hepken (anv an oberour, anv ar pennad, un tem bennak) oc'h implij an nozelennoù Ctrl + F ;

-Roll holl deizlevrioù Youenn Olier ;

-Meneger an anvioù meneget e deizlevrioù Youenn Olier ;

-Geriaoueg “Ar Feiz dre ar Meiz” Jil Ewan ;

-Renabl holl levrioù kozh a relijion e brezhoneg a zo e levraoueg EAT ;

-Prederiadennoù miziek Paol Kalvez ;

-Stad ar brezhoneg en Iliz e dibenn 2012 hag an oferennoù brezhonek da zont (ar roll-se a bourchasomp d'ar gelaouenn YA !) ;

-Stourmadennoù : hini ar poubellennoù melen hag an hini da virout ar Briedelezh naturel ; keleier a-berzh “Kafedioù Istor” Kevredigezh Vrezhon ;

-Prezegen Yannik Bonnet war an desevel-bugale

-Renta-kont emgav “Breuriezh Sant Erwan” diwar-benn “*Lumen Gentium*” e miz Gwengolo ;

-Liderezh an Eurioù (3600 pajennad). Kroget mat eo an trede levrenn gant Paol Kalvez ;

-Labourioù Bodad EAT “Ar Bibl Santel” ;

-Niverenn 77 “Kannadig Imbourc'h”.

Bodad “Ar Bibl Santel” hag ordinal an Oferenn

-Kaset eo bet un teuliad evezhiadennoù d'ar bodad etreskoptiel diwar-benn Ordinal an Oferenn, disoc'h kenlabour tri den ;

-Kenderc'hel a ra da vizskrivañ dornskridoù Maodez Glanndour diwar luc'hskeudennoù.. Evit poent n'eus nemet pevar den o labourat war-dro an dornskridoù ha skriverezet eo bet : Kohelet, Joel, Habakouk, Amos, Abdia, Yona, Ar Furnez, Kanenn ar C'hanennoù. **Ezhomm ez eus muioc'h a dud evit al labour-se** (700 pajennad ez eus da vizskrivañ)

-Kenlabourat a ra da aozadur ur Bibl anavezet gant Roma ha krog eo da adlenn al leksionalioù a zo war ar stern.

Stourmadenn ar poubellennoù melen

-moulet ez eus bet 1040 pegsun o deus koustet en holl 1600 euro, roet dre brofoù d'ar gevredigezh ;

-gwerzhet ez eus bet goude ur miz a vruderezh war-dro 60 pegsun nemetken ;

-roet ez eus bet betek-henn war-dro 200 pegsun. Kontañ a reomp war bep hini evit degas e skodenn hag e skoazell evit dasparzhañ muioc'h. Un doare pleustrek eo da vrezhonekaat emdro an tiegezhioù ; kendaoliñ a ra ar stourmadenn da ofisieladur ar yezh e Breizh gant ar strollezhioù foran ;

-lakaat a reomp a-gevret gant ar c'hannadig un nebeut skouerennoù a zo da skignañ par ma c'hellit ;
-skrivet ez eus bet da gumuniezhioù kumunioù bro Landerne, lizhiri chomet direspont ; embannet ez eus bet pennadoù en Télégramme, daou e "YA !", unan war "Bremañ", 500 lugadenn war an Agence Bretagne Presse.

Kamp Katekiz 2013

- emgavioù frouezhus ez eus bet er mizioù-mañ ha divizet eo bet mont war-raok ;

- e berr ez eo heñvel-poch ouzh pezh a zo bet graet dindan renerezh Yann Talbot etre 1988 ha 2000 : ar vuhez kristen e-pad ur sizhunvezh, gant prantadoù katekizerezh dre strolladoù hervez an oad, prantadoù diduiñ (kouronkadennoù, c'hoarioù), ha pediñ. D'ar gwener e vo pedet ar veleien hag an diagoned vrezhonegerien ha d'ar Sadorn e vo klozet gant un oferenn ;

- seizh den a zo evit poent er skipailh da gas ar c'hamp en-dro ;

- daou veleg o deus asantet kemer perzh evel aluzennerien ;

- moarvat e vo graet d'ar sul kentañ goude an Hanter-Eost e Plouha : eus ar Sul 18 d'ar Sadorn 24 a viz Eost ;

- kudennoù a chom c'hoazh : 1. Kavout yaouankizoù o defe ar parchoù ret evit ren ur c'hamp a seurt-se ; 2. Kavout unan bennak en defe ar breved " Evezhier kouronkañ » ; 3. Brudañ ar c'hamp Katekiz ;

- Hollbouezus eo an trede-poent : klask familhoù a-zevri a zo d'ober gant an holl izili evit an obererezh pouezus-mañ evit hor c'hevredigezh.

Imbourc'h : Poanioù-Spered an Tad Gwazdoue

Kontañ a reomp war an holl evit prenañ ar romant-se bet prientet e-pad hir amzer gant Yann Mikael.

An tad, ar vamm hag ar bugel setu an tiegezh naturel !



Nann d'an « dimeziñ » heñvelrev !
Manifestadeg e Pariz d'an 13^{vet} a viz Genver

Stourm pro life : Manifestadeg an 13 a viz Genver. Kinniget e vo dre bostel un emgav e Pariz d'an deiz-se evit manifestiñ a-gevret. Trugarez da c'hG. P. evit al logo en deus graet.

Gervel a ra eta "Emglev An Tiegezhioù" ar vrezhonegerion emskiantek eus penn-pouez ar familh, er gevredigezh, da vanifestiñ a-gevret e Pariz d'ar sul 13 a viz Genver. Evit lakaat e anv e karr-boutin Emglev An Tiegezhioù : eat@orange.fr 02 98 25 10 72
<http://emglev.wordpress.com>

Setu deuet dibenn 2012 gant an niverenn-mañ eus *Kannadig Imbourc'h*, soñjit, mar plij, kas ho skodenn : 15 € (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn) da adkoumanantiñ evit ar bloaz nevez. Trugarez deoc'h en a-raok !

**Nedeleg laouen deoc'h holl,
hag hor gwellañ hetoù evit
ar bloavezh nevez a zeu.**

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir daresev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X